




[www.editionsptitlouis.fr](http://www.editionsptitlouis.fr)





**War harzhoù an Ill-ha-Gwilun hag ar Morbihan emañ koad Pempont. Bevennoù an departamantoù n'eus ket d'ar vojenn evelkent ha n'eus harzhoù da Vreselien nemet re hon ijin.**

War ur sichenn roc'hellek gant skiltr ruz oadet a 600 million a vloavezhioù emañ ar c'hoad a oa bet annezet adalek nevezoadvez ar maen (-3000, -2500), warlerc'h da oadvez an arem. Furchadegoù a oa bet ha n'eus ket bet kavet kalz traoù hag askorn ebet, re dreñk eo an douar. Ouhzpenn hanter-kant meurvaen a gaver (aleoù goloet, peulvanioù, maenegi, taolioù maen, koufroù), awen ar mojennoù niverus int. En o zouez e kaver : Bez ar Ramzed, Ti Ninian, Liorzh ar Venec'h, Bez Merzhin.





Savet e oa bet Pempont er VIIvet kantved gant Yuzikael, roue Domnonea. Manac'h e oa, dont a reas da vezañ roue en-dro evit difenn e rouantelezh a-enep ar Franked, saveteet e voe gantañ. Ur peniti a savas, ne chom netra anezhañ. Distrujet e oa bet gant aloubadennoù ar Vikinged en IXvet hag en Xvet kantved. Savet e voe an iliz-abati en XIIIvet kantved war ur solenn eus an XIvet kantved ha nevesaet er XVvet kantved.

Gant Beneadiz e voe graet war-dro an abati, goude-se gant an Aogustined betek an Dispac'h. Breselien, Brekilien e brezhoneg, Brécilien, Bréchéliant... Goude an Dispac'h e oa bet anvet „Brocéliande" e galleg.

Pinvidik eo e gondon gant houarn, kalz gwez zo, stankoù zo e-leizh, abalamour d'an dra-se e oa bet degaset obererezhioù metalouriezh. Gouvelioù Pempont savet e 1653 o doa padet betek 1884. Dismantroù fornioù zo e Plerann o tont eus mare ar C'halianed pe penn kentañ ar mare gall-ha-roman, diskouez a reont e oa mengleuzioù kalz koshoc'h c'hoazh er c'hoad.

Dizoloit bremañ hoal ar c'hoad, al lanneier, ar stankoù, diwallit koulskoude d'en em gavout dirak ur sorserez, ur wrac'h, ur voudig, korriganed pe tud iskis all...





## FEUNTEUN BARANDON

Mojennoù a bep seurt zo stag ouzh ar feunteun burzhudus zo amañ abaoe kantvedoù. E-kichen al lec'h-mañ an hini eo m'o doa Merzhin ha Ninian graet anaoudegezh evit ar wech kentañ. Ma vo skuilhet dour ganeoc'h dre walleur war ar maen plad e tarzho arneviou, diwallit mat neuze !


## AN DRAOÑIENN HEP DISTRO

Sioul ha brav eo al lec'h hervez kont, hini Morgan eo, gant he c'harantez he doa roet he c'halon dezhañ, en feal en he zraoñienn. Bac'het e oant gant ur voger amzer en ur bed a blijadurioù.

Panevet Lanselod, feal da Wenivar, e vijent aze strobinelerezh hag e voent dieubet.

hanter c'hoar Arzhur. Trubardet e oa bet em veñjiñ a reas hag e vac'has an amourouzien aer tro-dro dezho, koll a raent muzul an

c'hoazh, dont a reas a-benn da derriñ ar




## ITRON AL LENN

Dre garantez evit Ninian e savas Merzhin ur c'hastell gwer strink bras komper. Er palez-se an hini eo ma voe desavet Lanselod gant dezhañ ar skiantoù, an arzoù hag an armoù. Da vare e bemzekvet dezhañ kuitaat ar bed strobinellet da zont da vezañ marc'heg

Karantez a vage evit Merzhin ha drezañ e teskas ar sorserez nav frazenn strobinellet evit bac'hañ forzh pehini a garfe. da vac'hañ Merzhin da viken en e doullbac'h aer e Brekilien.

diwelus d'an dud war stank Itron al Lenn. Deskiñ a reas deiz-ha-bloaz e lavaras Ninian an Daol-Grenn.

an holl droioù, en o zouez an Distagañ a reas an nav frazenn-se



## MELEZOUR AR BOUDIGED (AR SORSEREZED, AR GWRAC'HED)

Stank melezour ar boudiged zo e penn kentañ an Draoñienn hep Distro, un dor digor eo war ar mojennoù, hini kannerezed an noz eo an hini anavezetañ moarvat.

Dont a ra ar c'hannerezed war wel d'ar gwazed a chom re ziwzezh en ostalerioù ha na zeu en-dro d'ar gêr nemet pa vez noz. M'en em gavont dre walleur gant ar maouezed-se eo gwelloc'h dezho chom hep skoazellañ anezho da waskañ o c'houez en tu kontrol, da laret eo diouzh tu an diaoul, a-hend-all e vefent adkavet marv antronoz, paket en ul lienenn wenn.





## ITRON WENN TRESAOZON

Er XVIIvet kantved e oa ur bigrier o lakaat lasoù-kroug e-kichen kastell Tresaozon pa glevas trouz ur c'harr. Gwelet a reas daou zenjentil o tiskenn eus ur c'harroñs gant ur plac'h yaouank d'o heul hag hi gwisket gant ur c'habell bras o klask kuzhat ur sae eured. Spontañ a reas pa welas e voe douaret ent-bev ar plac'h yaouank gant an daou zen.

N'hallas ket ober mod ebet hag e c'halvas aotrou kastell Tresaozon da lavaret dezhañ an traoù spontus en doa gwelet.

Gant un nebeud mevelien ez eas ar c'hont betek al lec'h laret gant ar bigrier, met ur wezh dizouaret ar plac'h yaouank e varvas a-raok bezañ gouest da ziskuliañ tra ebet. He gouel hag he c'hurunenn a chomas betek an Dispac'h e chapel ar c'hastell, merc'hed yaouank a vro a zeue da stekiñ outo evit kavout ur gwaz.

## LIORZH AR VENEC'H

An hollad meurvein zo aze zo ur pevarzueg 27 metrad a hirder, bloc'hadennoù kouarz ha skiltr limestra o vont d'ober anezhañ. Savet e oa bet pevar mil bloaz 'zo ha ne ouzer ket c'hoazh da betra e servije.

Hervez ar vojenn e oa un aotrou garv ha menec'h ar vro o tremen o amzer oc'h ober lapavan hag o chaseal, devezh ar re varo zoken ! E-pad ar gousperoù e krogas un arnev spontus hag e kouezhas kurun an aotrou doue war ar riboderien a zeuas da vezañ mein.

## AR GADOR-RISKLUS

Tro-dro d'an Daol-Grenn lec'h ma vode ar varc'heien e chome goullou un azezenn a oa da vezañ evit an hini dilennet, an hini a zeufe a-benn da dostaat ouzh ar Gral. N'eus nemet Goulc'hoed a zeuas a-benn da dostaat ouzh ar Gral goude e-leizh a guriou, Peredur ha Bohor a oa asambles gantañ.



## Geriaoneg

**Arzhur** : Dont a reas a-benn da dennañ ar c'hleze Kaledvoulc'h diouzh an anev ma oa sanket don, dre an dra-se e teuas da vezañ roue. Sevel a reas urzh Marc'heien an Daol-Grenn a reas kurioù e-leizh tro-dro da glask ar Gral.

**Sorserezed (boudiged, gwrac'hed)** : Priñsezed o doa nac'h et dont da vezañ kristen, milliget e voent neuze gant an doueou.

**Gwenivar** : Gwreg Arzhur ha mestrez Lanselod.

**Gral** : kib kevrinus zo enni gwad ar c'hrist hervez. N'eus nemet Goulc'hoed, mab Lanselod, a oa gwerc'h ha glan a-walc'h a zeuas a-benn da dostaat outañ.

**Korriganed** : tudoùigoù bihan ha diaoulek ha gant nerzh dreistdenel.

**Lanselod** : Marc'heg Gwenivar deut da vezañ e garedig hag e varc'heg kadarn, desavet e oa bet gant Ninian. Dont a reas a-benn da derriñ strobinnellerezh Morgan he doa bac'h et an amourouzien difeal en Draoñienn hep Distro.

**Merzhin** : Ganet eo bet gant un diaoul hag ur werc'hez, un hudour eo en deus kelennet d'ar roue Arzhur penaos unaniñ ha merañ e vro.

**Morgan** : Hanter c'hoar Arzhur, rouanez ar sorserezed, "bet ganet gant ar mor" a dalvez he anv. Forc'hellek eo, gouest eo d'ober an droug kenkoulz hag ar mad.

**Ninian** : Itron al Lenn, Merzhin a gaso e ouiziegezh dezhi dre garantez. Gwareziñ a ra an amourouzien.

